



## CHANSON NEVEZ

Composet gant eun den yaouanc, eus a bares Brieç, voar sujet e Vestrez  
pehini e c'har gant eun-amitie barfet.

*Var etn ton nevez*

Chilaout eur chanson, so nevez composet,  
Pehini zo savet e mil eiz cant noantec ;  
Savet gant eun den yaouanc, er blaves ma present,  
En deus laquet e speret, da re garout e c'hoant.

Nac ebars e Brieç, er blaves-man present,  
Un dra melconius etre daou zen yaouanc.  
Pere dre amitie, o devoa disiret  
En eil d'eguile, vezen bet daou bried.

Evel d'or bar avel, erruas promptamant ;  
Bars er proposiou caër, voat, bet deut chanchamant,  
A ne sonjet dean, e voa sur à fidel  
A so bet trahisset, ya, n'en neus quet pel.

Tu i ar plac man so, eus e dud a loçanç ;  
Graç deo da brospere, bars er Brovidanç ;  
Ma vuellein bep date, an daou bried fidel,  
Ebars en o jardin, fleurio caër o sevel.

Me meus choaset eur vestrez zo d'am fantasi  
Pehini dre e guemet a so deut d'am charmi,  
Ganti ma an ale'houe eus ar zor va c'halon,  
Pehini or groa contant, on daou en peb feçon.

E bleo so allaour et melen e sint friset,  
E anal adorabl, evel pa ve musquet,  
E daouarn so melet gant ar glas hac ar guen,  
E bisach zo groet, evel d'or berlezen,

E muzellou so douç, douç evel ar mel pur,  
E anal adorabl evel d'ar surnatur,  
E daoulagat a vrill, evel diou stereden,  
E gousoup a so caër, evel d'eur berlesen.

E mouez zo ravisant, e speret, angelic,  
A lac a rivierou da danzel manific,  
An oll douar a saillo, ar pesquet a lampot ;  
Hac ar vartelodet en ho lest a zanso,

Ma mestrez a zo caër ar bleu er spern guen ;  
E diou-chot a so ru evel da ziou rozen ;  
E c'hyenou so caër, quer bras ez int pintet,  
Dridal ra va chalon, na demeus e guelet ;

Dridal ra ve c'halon na demeus e guelet ;  
Mar fell dec'h gouz pib eo a Tunic a zec hanvet  
Balamour ma credan, on gand Doue inspiret,  
Nac eil e c'haret gant amitie barfet.

Me meus caret va mestres ha o c'hare bepred,  
A me e c'hurufe, ma ve din permetet,  
A me e c'hurufe, ma vin din permetet,  
Quer caër e c'havan, evel an eol biniguet.

E mamm zo quer charmant nac ebars ar bed-man,  
Hi a garan certen, vel va mamm va hunan,  
Balamour ma e hi, e deus laquet e bed  
Ur plac'hic yaouanc flamm, pini garan parfet.

Tinic a so quer, coant vel d'ar ros er bed-man,  
Hannes, a dra certen, a blich dan dud yaouanc,  
Balamour de furnez, hac e sentiment vad,  
N'em deus er baros, vel dei quen agreabl.

O c'hoar bemde a so eur vreg fur a prudant  
O breur a zo ivez eun den yaouanc vailant,  
A tout e oll gueren so tud, a liguez vad,  
Deut oll do imita, gant o exemp ou mad.

Doue neus crouet gue, nac ebars er bed-man ;  
Hag e ve florissant, pa ve deut ar mis man ;  
Calon an tud yaouanc, so ivez memez-tra ;  
Pa ve deut ar mis-man, a ve carguet ar joa.

Pa n'em am c'hamp a goste, o sonjet bars er bed,  
Me glev eur voestic scler a droubl va speret,  
Ma teuis da sonjal pe c'helevis o cana,  
Voa un eostic, pe eur voenus, pe ma mestrez Tina.

Assata va mestrez, avanç a ran en oad,  
Bez a zo eun assembl, er c'haer peb ite,  
Mor be contant Doue ni allo assambles,  
Caër o devez an dud, o trouc presequeres.

Goal Doue, or c'hunduo lec'h man e volontez  
Caër o devez an dud, o trouc presequeres,  
Dommach a rel a reon, hini tam na vouelont,  
O trouc predi bemdeis doc'h eme a deoc'h enont.

Ganti ma an ale'houe eus a zor va halon,  
Hi e deus hi digor, dar Verc'hez an itron,  
Hi e deus hi digor, d'ar Verc'hez an itron,  
Evit antren enni, en e fossession,

Mari a Sant-Joseph, voent o daou assembles,  
En devoe amitie an eil evit eguiles,  
An dra-ze so caus, a meus laquet em speret,  
Da garout eur plac'hic, marteze n'am c'har quet.

Quemen ma e c'haran, ne oufe den laret  
Me garfe e dougen en touez an alet,  
A neuze pa vem ed ebars er barados,  
An dud malicius n'antrefint quot er gos.

Ma vezimp unisset, dre ar c'hraç a Zoue,  
Ne gafomp quet un amzer, hiroc'h evit eun de,  
Quen a vo deut an heur, da vont eus ar bed-man,  
Pe zeuiat da vervel, mont a dare gantan.

Ma bresantte dei eur boquet, ma ve permetet din,  
Pehini e ma c'halon, ne gar-den nemeti ;  
Mes ma na bermet quet, nac o queren ganoc'h  
Adieu, er barados, quenavo a laran d'eoc'h.

An teot malicius so caus a gals a gol,  
Quement e so ne, ma reont drouc ar bed oll,  
Ma allen commandi, ebars er jaoustat,  
Gant ho amission, ne alfe d'en monet

Hennez so eur pehet, ha ne huitait quet c'hoas,  
 E touez ar gueren nemeus a re dosta,  
 A ve an amission a vechou ar goassan.  
 Ar zon-ma zo zavet, certen a zo guir,  
 Zo zavet, d'eun-den yaouanc nalquet caout e zezir  
 Abalamour dan dud gan ho ambission  
 So o ampech anean nac ebars er c'hanton.  
 Marteze lod a c'hoarso, voar sujet ar son neve  
 C'hoarz, ar pez a garfont, na rin quet a boan dime  
 Lod a ve o c'hoarzin, na voar o sotani,  
 A bel al oc'h ober goab anezo e mon ia.  
 Ma clef ar Roue, quellou eus ar plac'h-se  
 A zeufe da Vriec, gantan eur messenger,  
 Da prononc ar c'hellou, enep d'ar plac'h yaouanc,  
 Evit ma lisaboso, quemenn an deus dei c'hoat,  
 Adieu melezeur caer, adieu tremen amzer,  
 Mout a ran Guengamp en desert a gaer.

Ma c'halonie a ran ar goal deot a ra vo muo.  
 Ma feldec'h gout ha clevet gant piou a son-ma gret  
 Gant eur baysan yaouanc, eus er bares Briec,  
 Gant eur baysan yaouanc, eus a draou ar bares,  
 Hennes en daus hi savet, goude coan eur nosves.  
 Mes ma so unan benag, bars e compagnones.  
 Hac en defe desir da c'hout piou eo, henes ;  
 Eo eur baysan yaouanc, eus a draou ar cresquer,  
 Mar fel d'oc'h gout piou eo, c'houi c'halvo an eo Pen  
 Assa compagnonez, a c'houlennan,  
 Ma n'em deo quet gret ervad ar chanson-man.  
 Me so eur den yaouanc, ne meus quet ar speret,  
 Difaiet a c'hanon, elec'h ma zon faiet.  
 Clevet a ret breman, ceto a nei ar fin,  
 C'houi a leso anei, me ne ouzoc'h quet quin,  
 A nep a gavo dean, n'en de quet doneat  
 A gomposo eun all, hac e vo agreabl



## KANAQUEN AN DURZUNEL

Galz'amzer a meus kollet  
 O forchal a c'hoajou,  
 Vit surpren eun durzunet  
 Kousquet var ar brakou

Devet a meus ma amors,  
 Ha tennet a meus fall  
 Achapet an durzunel  
 A nijet er c'hoat all *(bis)*

Dious ann noz hag ar mitin  
 O klevet lapousset  
 O kana, e fredonin  
 D'ha vek ar gvez pignet,

Na neus niken anezo  
 Hag a bik ma c'halon,  
 Evel moez eun durzunel  
 O welan d'he mignon,

Hirvoudin a ra noz de  
 Gant ar boan, ar glac'har,  
 Evel eun intanvez paour  
 Kollet ganti he far,

Na neus niken anezo  
 Hag a bik ma c'halon,  
 Evel moez eun durzun !  
 O welan d'he mignon

Petra durzunel iaouank,  
 A dourmant d'ha galon !  
 « Kollet a meus amezi,  
 Ma fidellan mignon ;

Ma na so eur chasseour  
 Da ober din mervel  
 Ma verro gant a glac'har  
 Da va mignon fidel

« N'eus na zouten, na remet,  
 Na konsolation,  
 Kapabl da zont da galmin  
 Tourmancho ma c'halon

Trec'het oun gant a glac'har,  
 Mont a ran, da vervel,  
 Mez na varvin ke kontant,  
 Ma na varvan fidel.

Guelet a meus o vervel  
 An durzunel iaouank  
 Dizec'he eo ma c'halon  
 Gant ar boan ann tourmant

Eon he c'huanad diveza  
 En deus c'hoas repetet  
 « Ha ma mignon fidel » !  
 Raktal eo tremenet.

Melezour scler ha brillant  
 Demeus ar fidelite,  
 Ar model ar sinseran  
 Demeus ar garante

Nan na varvin ket kontant  
 Ma na varvan fidel,  
 Birviken na zizonjin  
 Maro ann durzunel.